


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	8
	Kelaouennoù	22
	Notennoù	29
	Roll pennadoù 2020	34

Herve LATIMIER

The Testaments,
gant Margaret Atwood,
Penguin Random House,
2019,
422 bajenn, 25,50€



Kalz ac’hanoc’h o deus lennet *The Handmaid’s Tale*, e saozneg, e galleg marteze pe e brezhoneg a-drugarez da droidigezh Alan Martel, *Istor ar Vatezh Ruz*, bet embannet gant *An Alarc’h*.

Kendalc’h an istor-se eo *The Testaments*. M’ho peus soñj, ec’h echue *Istor ar Vatezh Ruz* gant “treuzskrivadur darnel danevelloù Daouzekvet Kendael ar Studiadennoù Gileadek” aozet

d’ar 25 a viz Ewen 2195. Diskouez a rae ar c’hlozadur-se e oa da gaout spi evit tudennoù ar romant hag e oa bet diskaret ren Gilead abaoe ur pennad e 2195. Ne zisplegin netra a-zivout aozadur Gilead, he rummadoù tud hag he reolennoù bevañ, hec’h emzalc’h e-keñver ar merc’hed. Kenkoulz mont da zizoleiñ anezho en *Istor ar Vatezh Ruz*.

Echuiñ a ra *The Testaments* en

un doare heñvel gant “Trizekvet Kendael ar Studiadennoù Gileadek” d’an 29 ha d’an 30 a viz Ewen 2197.

Diazezet e oa al levr kentañ war deizlevr ar “Vatezh Ruz” enrollet war gasedoùigoù bet dizouaret er pezh a oa a-raok ren Gilead kêr Vangor e Stad ar Maine.


Diazezet eo ar romant-mañ war un deizlevr bet dalc’het gant Aunt Lydia, renerez Ardua Hall, “kouent” ha skol stummañ ar Moerebed ha treuzskrivadur daou desteni a-berzh div blac’h yaouank o doa gellet tec’hout diouzh Gilead, Agnes Jemina ha Nicole. Ma c’hellfe bezañ un douetañs vihan war an diell kentañ ec’h eo sur, pe dost, kelennerien 2197 ez eo gwir an daou all. Darvoudoù disheñvel ha selloù disheñvel war an darvoudoù boutin kinniget en un doare kronologel. Betek ar fin en em c’houlenner penaos ec’h echu an istor... Ur bern liammoù zo gant al levr kentañ, tudenn Aunt Lydia da gentañ. N’eus ket tu da gomz eus al liammoù all hep mont re bell ganti...

Bevañ a reer disac’hadur ur Stad hollvelour teokratel gant ar stourmerien diabarzh ha diavaez evel-just met gant he breinadur-hi ivez. Soñjal a reer e Bro-Iran

pe en Alamagn ar Reter pe Polonia. Ma kontan mat en deus padet ar renad nebeutoc’h eget hanter-kant vloaz. Tonkad pep renad hollvelour e vefe ? Gant ma vefe gwir...

Skrivet dreist eo an oberenn. Spi ’m eus e vo savet ur film pe ur stirad diwarni. Danvez zo. N’enaouer morse.

Le Christ philosophe,
gant Frédéric Lenoir,
Plon, 2009,
306 pajenn, 9€



Sklaer eo an titl. N'eo ket danvez al levrl teologiezh pe relijion met ar pezh o deus degaset preder ha kelennadurezh ar C'hrist d'ar bed. Ur raklavar, seizh chabistr hag un dibennskrid a gaver el levr.

Kregiñ a ra ar raklavar gant un dave da zremmegañ an Inkizitor meur e romant Dostoievski *Ar Vreudeur Karamazov*. Ar gristeniezh trubardet gant ar gristelezh. Gouestlet eo ar chabistr kentañ da istor Jezuz (*L'histoire de Jésus et le Jésus de l'Histoire*). An eil chabistr, *La philosophie du Christ*, zo dedennus-tre. Diskouez a ra pegen reveulziel e oa kelennadurezh ar C'hrist e-keñver sell kevredigezh yuzev e vare ha petra a zegasas. Lodenn dedennusañ ar chabistr zo an hini a bled gant buhezegezh ar C'hrist, *L'éthique du Christ* (p.71),

moarvat. Evit Frédéric Lenoir ez eo diazezet buhezegezh Jezuz war un toullad pennaennoù : ar gevatalded etre an holl dud, frankiz pep hinienn, frankizadur ar merc'hed, ar justis sokial, disparti ar galloudoù, an nann-feulster hag ar pardon, ar garantez evit an nesañ... Reiñ a ra an aozer un dielfaennadur ha daveoù bewech.

An trede hag ar pevare chabistr zo istorel. *Naissance du Christianisme* a bled gant penn kentañ ar gristeniezh hag he disparti diouzh ar yuzeviezh. Echuiñ a ra gant un dave d'an impalaer Kustetin ha d'e levezon pouezus ha drastus war dazont ar gristeniezh. *Une société chrétienne* a zispleg mat penaos en deus ar fed e vefe deuet ar gristeniezh relijion ofisiel an impalaeriezh distummet ha trubardet kelennadurezh

Jezuz o liammañ an Iliz ouzh ar galloud. Traoù mat zo bet, dreist zoken, met pegement a draoù spontus. Ar gristenelezh enep ar gristeniezh.

Daou dra o deus hegazet ac'hanon en daou chabistr-se koulskoude. Pajenn 120 e lenner « *La foi en Jésus-Christ s'étant très vite, essentiellement autour de centres urbains [...], elle atteint [...] même l'Angleterre au III^e siècle* ». Ne oa ket kalz Saozon e Breizh d'ar mare-se ha n'eo bet roet ez-ofisiel an anv a Vro-Saoz nemet e 927 pa voe krouet ar Rouantelezh Saoz. Ouzhpenn e tiorroas ar gristeniezh kelt kentoc'h war ar maez en-dro d'an abatioù... Meneg ebet pp.135-136 eus ar vanac'hiezh keltiek nag eus levezon vras tud evel Sant Koulman.


E *De l'humanisme chrétien à l'humanisme athée* ha *La matrice du monde moderne*, e chomer war dachenn an istor, met istor ar mennozhioù. Diskouez a ra Frédéric Lenoir pegen pouezus, diazez zoken, eo bet levezon filozofiezh ar C'hrist war emdroadur ar mennozhioù abaoe ar XIV^{vet} pa c'han an denelouriezh. He roud a gaver e preder an darn vrasañ eus ar prederourien, ar re digristen pe

enepkristen peurgetket. Kente-lius-kenañ.

Anvet eo ar chabistr diwezhañ *Que reste-t-il de chrétien en nous ?*. Ar gristenien er bed a-vremañ met ivez plas ar gristeniezh en hor sevenadur (*Une culture imprégnée de christianisme*), er vuhez pemdez evel er prederouriezh (*Le Christianisme invisible*).

Diazezet eo an dibennskrid war prederiadennoù diwarbenn Emziviz Jezuz gant ar Samariadez (Yann 4, 6-27). Diskouez a ra al lodenn-mañ ur wech ouzhpenn pegen reveulziel eo kelennadurezh Jezuz. Ma n'hellit ket lenn al levr en e bezh, lennit ar rann-mañ hag a ro un tañva eus danvez an holl oberenn.

Dracula,
gant Bram Stoker,
Penguin Classics, 2003,
454 fajenn, £5,99



Piv n'en deus ket gwelet ur film pe meur a hini savet diwar-benn Dracula pe awenet gant e istor ? Evel kalz a dud ne 'm boa ket lennet levr Bram Stoker, ar vammenn. Graet eo. Lennet em eus buan ha gant plijadur daoust d'ur yezh pinvidik-kenañ ha diaes a-wechoù. Hag-eñ e talv' ar boan ober un diverrañ eus an istor ? Ne soñj ket din.

Aliañ a ran hol lennerien da dañva an destenn orin. Savet eo bet e stumm arroudennoù lizhiri pe deizlevrioù. Ul lusk ispisial a ro se d'an oberenn ha selloù disheñvel war an darvoudoù. Sachet eo bet ma evezh gant daou dra : pouez ar gristeniezh e-touez ar *good guys* hag ar *good women*, betek bezañ arabadus ; pouez roll ar merc'hed hag hini Mina Murray dreist-holl.

En embanndurioù *Penguin Classics* e kaver beped rakskridoù dedennus-tre savet gant skolveuridi alies. Amañ ez eus ur c'hentskrid gant Christopher Frayling, *Rector of London's Royal College of Art* hag un digoradur gant Maurice Hindle, *Arts Faculty Manager for the Open University in London*. Desket e vez ur bern traoù en daou bennad-se diwar-benn Bram (Abraham) Stoker hag e vuhez evel-just met ivez a-zivout plas an oberenn e kevredigezh Breizh-Veur viktorian hag an dielfennadurioù a c'heller ober war he divout. Ganet eo bet Bram Stoker e Dulenn e miz Du 1847 hag aet da Anaon e Londrez e miz Ebrel 1912. Un *Anglo-Irish* e oa eta, evel Oscar Wilde. Deskiñ a reer ez eo bet embannet un droidigezh eus *Dracula* en iwerzhoneg

e 1933 (troet gant Seán Ó Cuirrín hag embannet gant *Oifig Díolta Foillseachàin Rialtais*). Goude studioù e Trinity College e teuas Stoker da vezañ kargad e Dublin Castle a-raok mont da labourat evit Henry Irving (1838-1905) evel merour al Lyceum Theater. Bamet e oa gant personelezh hag oberoù Walt Whitman ivez.

Un toullad tuoù eus *Dracula* a vag daeloù. An daou raksrid a bouez war plas ar rev en oberenn dre an darempredoù etre ar vampired hag an dud. Arabat ankouaat e vezer e Breizh-Veur viktorian pa voe embannet al levr. Lakaet e vez en a-raok ivez pegen dedennet e oa Stoker gant an teknikoù nevez (an enrolladennoù hag ar mekanikoù da skrivañ hag ar berrskrivañ a vez implijet gant tudennoù *Dracula*) ha skourroù ar skiant d'e vare (psikiatriezh, neurologiezh, teogerezh, labourioù Charcot). Ur roll a bouez o deus en oberenn.

E-touez an danvezioù dael ez eus plas ar merc'hed hag ur seurt gouenelouriezh a c'heller santout en oberenn. Evit ar merc'hed : o flas er gevredigezh ha sell ar gevredigezh war o buhez revel. Evit ar ouennelou-


riezh : hag eñ ne vefe ket sorc'hennet Stoker gant an aon da welet ar sevenadur kornôgat ha yuzevkristen difennet gant ar strolladig chaseourien sunerien wad, aloubet ha diskaret gant arallvro aroueziet gant ar vampired ? Da bep hini ober e soñj.

Dont a ra din ur goulenn all awenet gant oberennoù hon mare. Ha ne vefe ket ul liamm etre *Dracula* hag a vez anvet *Mestr* gant e ziskibien ha *Dark Lord* Harry Potter, Voldemort ? Memes sec'hed galloud, memes emgarantez, memes c'hoant maestroniañ ar re all... Hep plas forc'hellek ar blijadur marteze, ha c'hoazh...



**Magali BARON,
Erwan Hupel &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

Pellgent Loc'h Laoual,
gant Youenn Drezen,
Al Liamm,
136 pajenn, 12€



Labour embann brav a zo bet sevenet evit dastum meur a zanevell skrivet gant Youenn Drezen (1899-1972) e-kerzh e vuhez, ha bet embannet gwechall e kelaouennoù disheñvel. Teir danevell diembann zoken a zo da lenn evit ar wech kentañ en dastumad-se. Eus 1927 betek

1957 e c'hell al lenner kaout un tañva eus liesseurted awen Youenn Drezen, evel ma vez diskouezet mat-kaer gant Bernez Rouz en e rakskrid. Renket eo an danevelloù-se hervez urzh an amzer, hag an embanner a ginnig pep hini gant un destenn verr, en ur resisaat ar gendestenn

ha raktres an aozer d'ar mare ma oa bet savet. Graet ez eus bet ul labour a-feson gant Bernez Rouz, Jil Penneg, Yann Guilla-mot, Riwal ha Tudual Huon.

N'eo ket unvan na temoù na stil ar skridoù-se. Ne dennont tamm ebet da oberenn e geneil Jakez Riou, en doa kavet e berrder an danevell ar stumm a oa dioutañ e gwirionez. Gant-se e oa deuet a-benn da gavout un ton dezhañ e-unan, ma teu kriz-der diwar ar berrder, c'hweroni ha douster poanuis diwar an traoù tavet, hag unvaniezh diwar bed an dud simpl war ar maez. Skrivañ "brezhonek", kavout e vouezh e brezhoneg, evit Youenn Drezen, ne sinifi ket dre ret skrivañ krenn, nag en em ouestlañ da rummad lennegel an danevell. Anavezet eo kentoc'h evit e romantoù, *An dour en-dro d'an inizi*, *Intron Varia Garmez*, *Sizhun ar breur Arturo*, *Skol Louarn Veig Trebern*. Ne vir ket outañ koulskoude da sevel danevelloù turgnet mat, hag a zis-kouez un tu dianav eus e oberenn. Reiñ a reont da glevet tonioù ha temoù disheñvel, a ginnig ur skeudenn klok a-walc'h eus e vuhez hag eus mammennoù e awen, kemm mat etreze.

E-barzh « Mintin glas », an danevell gentañ, embannet e 1927, eo deuet a-benn Youenn Drezen da reiñ mouezh d'ar yaouankiz-flamm, hini ar bed, an deiz, hag ur plac'h koant o kanañ war vord ar poull-kannañ. Kregiñ hag echuiñ a ra an danevell gant ur ganaouenn, « ur sonig mibin e-giz eskell », evel pa vefe nijet kuit ar plac'h a-boan spurmantet he c'hened, en ur leuskel eñvor he c'han hag he c'hoarzh war he lerc'h. Lijer ha bliv ec'h a ar bluenn ivez, en ur daolenniñ sklaerder ha splannder ar beure hag an nevezamzer. Er c'hoant hag en estlamm an daneveller n'eus netra tort na poanuis. Gant an doare skañv ha birvidik-se e teu raktal da soñj d'al lenner eus romant kentañ Youenn Drezen, *An dour en-dro d'an inizi* (1932).

A-hend-all e vez kavet ivez en dastumad ur gontadenn Nedeleg fromus ha skouerius, « Noz Nedeleg Loeizig », gourc'hemennet gant ar chaloni Cardalieguet, a oa e penn *Le Courrier du Finistère*. Div zanevell, « Al laeron avaloù » ha « Foeneg an Dourig Kozh », a gont eñvorennoù bugaleaj. En hini gentañ e seblant ar yezh

dreveziñ ar yezh komzet hag ar c'homzoù distaget prim-ha-prim gant ar vugale, evel pa vefe ar skrid o redek war o lerc'h, hep na vefe amzer da beurlipat frazennoù klok. E « Foenneg an Dourig Kozh » e vez santet ur seurt hiraezh tener hag eleveziek ; n'eo ket kement-se ar sotonioù graet gant ar vugale a zesach an evezh, met kentoc'h ton an eñvorenn, aergelc'h dinec'h ar c'hoarioù, hag an doare da daolenniñ teneridigezh rust ar re gozh, a c'hourdrouz ar re vihan un tamm, hep ankounac'haat reiñ dezhe o merenn vihan.

Kavet e vez ivez div zanevell faltazius awenet gant mojennoù kozh, « Pellgent Loc'h Laoual » (1929) hag « Ar c'hloc'h aour ». Diwar vojenn Kêr-Iz eo bet savet an istor kentañ, ar pezh na vo ket kavet iskis pa anavezer entan “triad Fontarabie” evit ar Barzhaz Breizh. Un aergelc'h kevrinus ha skrijus eo deuet a-benn Youenn Drezen da grouiñ er skrid-se, ma vez adsavet amzer drubuilhet an Dispac'h gall. Tra ma vez lidet oferenn ar Pellgent dre guzh, en ur frailh war an aod, e spurmanter fanolioù en deñvalijenn, mogerioù mein uhel deuet d'un

iliz-veur, mouezhioù o trouzal er c'hev evel re tasmantoù : darev eo al lenner evit ma teuy war wel Anaon ar gêr villiget, en ur weledigezh spouronus.

Estroc'h evit mojennoù kozh avat ac'h a d'ober andon awen Youenn Drezen. Unan eus an danevelloù diembann, « Ar soudard Berthelot », a bled gant mare an eil brezel bed, hag a gont penaos e veze eveshaet gant ar polis ar soudarded vreizhat, kement ha morc'hed ranngalonus an hini en doa asantet traisañ e genvroiz. E-touez an danevelloù a vez kavet e fin an dastumad ez eus meur a hini a glask taolenniñ buhez tud ar Gelveneg. Tonket e oant da gemer perzh en ur romant, *Rozenn ar Gelveneg*, n'eo ket bet kaset da benn gant an aozer. Sevel a ra Youenn Drezen poltred hoalus ur Vigoudenn bliv ha dichek o vont gant an hent, hag o vourrañ gant kan ar skrilhed ha tommder miz Mae. Taolenniñ a ra ivez, en un doare bev-buhezek, aergelc'h ar porzh-pesketa, distro ar bigi, safar ar mouezhioù war ar c'hal, stirlink chadennoù an eorioù, dañs ar gouelini, komzoù prim eskemmet gant ur plac'h hag hec'h amourouz. Moarvat en

deus graet e vad ar skrivagner eus an traoù en doa bevet war ar pemdez, pa oa o labourat e ti ur marc'hadour gwin er bloavezhioù 1917-1919. Un drugar eo e vrezhoneg yac'h, liv e vro gantañ, leun a droioù-lavar hag a c'herioù resis tennet eus geriaoueg pesketaerien ar Vro-Vigoudenn. Dre chañs ez eus bet lakaet notennoù sklaer ha talvoudus da zisplegañ anezhe e brezhoneg.

**366 Haiku,
Ugent vloaz a varzhoniezh,
Vint ans de poèterie,
Vingt ans de concours de
poésie,
Keit Vimp Bev,
132 bajenn, 10€**

E 2001 e oa bet aozet ur genstrivadeg haiku gant ar gelaouenn *Hopala* ha kendalc'het an avantur gant ar *Festival Taol Kurun*, diwar atiz Fanny Chauffin ha Mai-Ewen, hag o deus foetet bro evit lakaat bugale ar c'hlasoù divyezhek da bleustriñ war an haiku. Un ugent klas bennak, da lavarout eo tost da bemp kant bugel. Gant se e

Daoust ma c'heller kavout un tamm dizingal ha digompez an danevelloù kinniget, ez eo hep mar ul labour ret ha dedennus a zo bet graet gant an embanner. Ouzhpenn ur gwir blijadur lennegel e ro ar skridoù-se un testiñ a bouez eus taolioù-esae o aozer, kement hag eus pinvidigezh e awen.

MB



kemer perzh, bep bloaz, bugale, krennarded ha tud deuet er genstrivadeg haiku. El levrig nevez embannet e kaver 366 haiku, e-touez ar re wellañ bet pen-naouet etre 2001 ha 2020 e-barzh eostad ar vugale, ar grennarded hag an dud deuet. Teiryezhek eo ar genstrivadeg : brezhoneg, gallaoueg ha galleg. Sed unan bet savet e 2016 gant

Margaux, rummad ar vugale,
skol Diwan Bannaleg :

*Digor eo ma frenestr
an avel o kas ac'hanon
betek an oabl*


Un daouzek den, bet ezel eus
ar juri, a zo bet pedet da ginnig
un destenn verr e fin al levr evit
displegañ o soñj diwar-benn an
haiku dre vras, ha diwar-benn ar
pleustriñ haiku e Breizh gant ar
re vras hag ar re vihan. Bernez
Tangi eo en deus roet lañs d'an
ergerzhadeg gant ur varzhoneg
digeriñ. Skeudennoù e liv a
gaver ivez e-kreiz al levr evit

An Arvest,
gant Bernez Tangi
Skrid,
60 pajenn, 10€

« Gwelloc'h ar pec'hed eget
ar marv », a lenner e fin *Fablen-
nig an avalenneg*. « Bevañ a
reer gant ar c'hoantoù / Treuz-
vevañ gant ezhommoù » a bouez
Raoul Vaneigem, meneget gant
Bernez Tangi e talbenn *Ar*

testeniañ eus an abadennoù
aozet da-geñver roidigezh ar
prizioù. Ul levr plijus ha deden-
nus evit mont e-barzh kalon an
haiku, ar stumm barzhoniezh
poblec-se, a oar tostaat fiñva-
dennoùigoù an natur ouzh tri-
vliadennoù ar galon. Mil haiku
a vez resevet bep bloaz da-geñ-
ver ar genstrivadeg. Mil pevar
c'hant e 2021 zoken ! Brasañ
skol varzhoniezh zo bet e Breizh
abaoe pell ! Digor eo d'an holl
gwitibunan, daoust ma c'hell
bezañ soutil-kenañ haiku ar
gwir varzhed !

MbdB



vougev. Sed an alc'hwez, mar-
teze, evit digeriñ kev kuzh ar
barzh, dindan ar menez. Aze e
tifluk eienenn an awen, eienenn
ar vuhez. Rak ar vuhez an hini
eo a gont, ar vuhez roet deomp
evel ur prof roueel, un dra sakr,

liammet ouzh ar groudigezh hag ouzh ar frankiz, liammet ouzh an natur, ouzh ar c'hoantoù, ouzh ar spered, ouzh ar c'hig...

Tomm-gor an Arvest, met glan eo kenkoulz all, da lavarout eo : divaskl. « Ar goantiz a rank bezañ livet / hep c'hoant / Peotramant e vefe saotret »... Ha livañ brav a oar ober Bernez Tangi, gant e bluenn koulz ha gant e varr-livañ. Eizh taolenn a zo bet enbarzhet e-kreiz an torkad. Livet flamm, arouezius, kentitik, eeunek, erotek, kreñv !


Diaes eo komz eus barzhonegoù Bernez Tangi, ken lies-seurt ez int. Berr pe hir, klotennet pe get, e gwerzennoù pe e komz plaen, kanaouennoù, chuchumuchu, yudadennoù... Lod tud a c'hellfe bezañ direnket gant kement a zistabilded. Trec'h ar vuhez o lufrennaouiñ eo, soubet en un endro gwengelouriel : « Kevrinus eo ar gened ». Arz Bernez Tangi a zo kriz ha lusket kreñv atav. War hent an orinoù ez eer en e gerz, e-touesk mojennoù Kêr-Iz, pe Marzhin, adijinet penn-da-benn, diwar spered 68 pe *Yod Kerc'h* : « Lakait em c'hichen an holl feskennoù ». Pedet omp da « fest ar muzelloù hag an teodoù » adalek ar varzhoneg

kentañ, *Fata Morgana*, ha didro-kaer ! « Flouret 'n eus he zalier / ha dichipot / gant e etevberv / n'eus sanket / e marbr ar forzh / varlonk don gleb / Er skalf blevek / Goueledet ar wialenn / er c'haridenn / Mont ha dont / sioul / Plijadur ar c'hig [...] ». « Bevañ ha krouiñ / abadennoù didermen / dindan spered ar Riboul / Frankiz ar yaouankiz », setu gerioù-stur un amzer zo bet, gant Storlok 'n roll...

Met ur « Fata Morgana » n'eo nemet un touellwel. Ne bad ket gwall bell. Goude ar gouel, goude an didarzhadenn volkanek, en em gav ar barzh e-unan, beuzet en e eñvorennoù : « Ma unan a-wechoù, evel un enezenn e-touesk ma c'hempredidi ». Neuze e vez roet da glevet « yudadenn skiltr an den e-unan », o stourm ouzh ar poanioù spered, tost d'en em goll er follentez. Ar vuhez hag ar stourm... N'eus ket tu d'o dispartiañ : « Pediñ ha stourm a ran bemdez evit ma vo diac'hub va fobl ».

MbdB

Anna Skolan,
gant Mich Beyer,
An Alarc'h Embannadurioù,
192 pajenn, 10€



Ur gwir blijadur eo bet din lenn *Anna Skolan*, romant diwezhañ Mich Beyer, dezhañ da vezañ an hini krisañ marteze. Pe abalamour da se... Adalek ar golo, kaer ha kevrinus, betek al linenn ziwezhañ, on bet sordet gant istor Anna, dres evel m'eo bet Winnog, an daneveller penañ. N'hell ket chom digas ul lenner breizhat ouzh an titl, da gentañ penn. Soñjal a reer e gwerz *Yannig Skolan*, ma vez kontet torfedoù euzhus Yannig, deuet da c'houlenn e bardon digant e vamm evit adkavout peoc'h e ene er bed all : « Me 'ya d'an ifern da leskiñ / ma na geret va fardoniñ ». Aes ober ul liamm gant Emil Skolan, tad Anna, oc'h aspediñ e verc'h d'e bardoniñ : « Etre da zaouarn emañ va ene, va merc'h ». Met re ziwezhat eo evit pardoniñ. Tud fallakr, abred pe ziwezhat,

ho pezo greun diwar o had... Hag Anna Skolan, bet distrujet he buhez eürus d'he dek vloaz, n'eo ket maouez da glask he dic'haou diwar hanter. Ur seurt euzhvil eo deuet da vezañ, peurzebret he spered gant ar boan hag ar gasoni.

N'eo ket alies e vez pledet ken splann gant an torfedoù revel en hon lennegezh. Goût a ouzer a-walc'h, koulskoude, pegen niverus eo bet hag ez eo c'hoazh an drougoberoù revel gant minored, pe matezed. Tud dizifenn en abeg d'o oad, d'o dinerzhded pe d'o statud. Ha kuzhet an torfedoù-se gant lezenn an tav, peurliesañ. Eus an tem feuls-se he deus graet Mich Beyer ur gwir skrid-skrij¹.

Gant kalz a vestroni e vez mesket ganti tri live dezrevell : hini an aozourez a ginnig an

1 Thriller

istor, hini Anna Skolan war ar c'haieroù kozh m'he deus douaret he c'hounioù hag he daeroù, hag hini Winnog, en deus kavet kaieroù kuzh Anna en e jardin hag a glask klokaat he danevell, diouzh ret. Tremena ra al lenner eus an eil live d'egile hep rat dezhañ, ken aes ha tra, hep en em goll war hent itrikoù diaoulek Anna. Ur rebechig evelkent : tamm-ha-tamm e teuer d'en em voazañ ouzh *modus operandi* Anna, ken e teu da vezañ rakweladus, zoken ma vez disheñvel mat an degoue-

zhioù bewech. Ma... Merk oberezh ar *serial killers* an hini eo...

Bourrañ a ran gant yezh Mich Beyer, gwevn hag eztaolus. Pebeilañ a ra al luskoù prim hag al luskoù gorrek diouzh ezhommoù an dezrevell, evel ur sonaozourez. Diwar arz ar save-rezh hag ar gendoniezh he deus graet ur gwir sinfonienn eus he levr. C'hwekat hag spontusad dañs bekabe !

MbdB

Ar gelaouennerez,
gant Michelle Nic Pháidín,
troet diwar an iwerzhoneg
gant Rhisiart Hinks,
An Alarc'h Embannadurioù,
110 pajenn, 10€



Ur romant berr ha plijus eo *Ar gelaouennerez*. Plac'h a vicher eo an aozerez. Santet e vez e oar diouzh ar birvilh hag ar c'hevezerezh a vez o ren er salioù skridaozañ. Nevez erruet eo Bríd, ar benndudenn, e skipailh *The Irish Times*, e Dulenn.


Ha buan e tiskouez ez eus danvez enni. Kaset eo d'he c'hêr c'henidik gant ar bennskridaozerez, anezhi ur gwir berseval, evit furchal-difurchal war troioù-kuzh floderien drammoù, en Donnegal. Adkavout a ra he mab eno. Ur paotr seitek vloaz

eo, desavet gant e vamm-gozh, tra ma vez-hi dalc'het gant he labour e Dulenn. An tad ne ouzer ket mat pelec'h emañ. Dibriedet ar c'houblad. Abalamour da betra ? Komprenet e vo tamm-ha-tamm. N'eo ket brav an daolenn. N'he deus ket Bríd kalz amzer evit ober war-dro he mab, anat, ha diaes an traoù etrezo. Teir danevell meskdivesk a dap krog ennomp pa lenner *Ar gelaouennerez*. Un enklask polis, istor ur vamm oc'h adskoulmañ darempredoù

gant he c'hrennbaotr, ha stourm ur vaouez a glask he flas er vuhez vodern : labour, karantez, familh... Ur gevataladenn gwall ziaes klask penn dezhi. Dedenus al levr neuze, nemet ez eo un tamm skort marteze. E-giz ma vije eus *Ar gelaouannerez* senario ur film skinwel... Re vuan e tiviner disorc'h an enklask. Mat e vije bet ouzhpennañ ul loaiaed chaous war ar rost...

MbdB

Ar re vrizhellet,
gant Hugo Hamilton,
troet diwar ar saozneg
gant Herve Beg,
An Alarc'h Embannadurioù,
362 bajenn, 14€



Gant *The speckled people/Ar re vrizhellet* en deus Hugo Hamilton kroget da zastum brud war e anv. Berzh en deus graet e levr eñvorennoù bugaleaj er bed a-bezh. Ha n'eo ket souezh. Diwar e skiant-prenet e sav an aozer goulennnoù reizh a-zivout identelezh Mab-den er bed

kempred, ha plas ar yezhoù bihan peurgetket. Un diroll a *code-switching* ! Penaos tennañ splet eus hor glad istorel hep bezañ sklavet gantañ ? Penaos degemer an arallded hag an hironaat, hep koll hon ene ? Da be boent e teu un emsaver da vezañ strizhsperedet ? Penaos

difenn un uhelvennad pe krennennoù start, hep disprizañ ar re na soñjont ket eveldomp ? Peseurt diforc'h lakaat etre stourm ha brezeliñ ? Penaos derc'hel penn ouzh ur galloud divent ? Daoust ha posupl eo enebiñ didrouz hep bezañ kenwaller ? Peadra da zedennañ Yann lenner, ha d'e zirenkañ meur a wech...

E Dulenn emamp, er bloavezhioù 60. En ur familh iskis a-walc'h eo ganet Hugo. E vamm a zo a orin eus Alamagn. Trubuilhoù he deus bet he familh dre enebiñ ouzh an nazied. Met kemer a ra an traoù dre o fenn mat, daoust m'he deus bevet darvoudoù kriz meurbet en he bro c'henidik. Dalc'hmat e vez war he zu, prest da c'hoarzhin ha da gomezañ ar rendaeloù. Kejet he deus gant he fried en Iwerzhon. Ur brogarour dibleg ha gredus zo eus tad an aozer. Graet en deus troioù prezegeniñ dre ar vro ur mare zo bet evit kanañ meuleudiñ d'ur vro Iwerzhon adperc'hennet ganti hec'h ene gwir. Mennet eo da ziverkañ nep roudenn eus Breizh-Veur war an enezenn. Un den ijinus eo a-hend-all. Klask a ra aozañ ha gwerzhañ

kement tra a ra diouer da Iwerzhoniz, hervezañ. Bewech ez a an tenn er c'hleuz avat, ken techet eo da gammgemer e hunvreoù kaer gant ar gwirvoud. Ne deu ket a-benn da dreññ Dulenniz a-du gant e gaoz, met chom a ra mestr en e di. Ne vez nemet iwerzhoneg hag alamaneg er gêr. Berzhnet eo ar saozneg. Berzhnet eo daremprediñ bugale na gomzont ket iwerzhoneg. Berzhnet eo sellout ouzh bugale o c'hoari e saozneg... Ha pa vez torret al lezenn gant unan eus ar vugale e vez kastizet taer. Goulenn a ra an tad gant Doue silañ e pleg e skouarn pet taol gwialenn a vo dereat skeiñ gant e vab a-benn ma vo lamet e bec'hed.

Eus eñvorennoù ez eus kont, a skriven, met n'eus ket eus *Ar re vrizhellet* un emvuhezskrid rik. Ul labour arzel ha lennegel eo. Displeget e vez an darvoudoù dre selloù ha dre c'henoù ur paotrig dindan dek vloaz. Ne gompren ket pep tra, met reiñ a ra da welout penaos ez intent an traoù. Ne vez ket doujet atav d'ar gronologiezh gant Hugo Hamilton. Cheñch prantad ha leurenn a ra gwech ha gwech all, hep kas keloù. Monedonea a reomp eus emsavadeg Pask da

zeroù an eil brezel bed, eus deroù an naziegezh d'ar bloavezhioù 60. Bro-Alamagn, Bro-Iwerzhon... Dulenn, Cork, ar Gaeltacht...

N'eo ket ur c'hoari diabeg a-berzh Hamilton koulskoude. Reiñ a ra da santout pegen kemmesket eo spered ar paotrig. Ne oar ket mat piv eo. An tad, ar vamm, ar vugale a zo estrañ-jourien en o c'harter. Bevañ a reont war un enezennig e-kreiz an enezenn vras... Pa ya Hugo er-maez eus e di, gwisket gant e vragoù Lederhosen ha gant e stammenn eus inizi Aran, en em sant evel un divroad en e vro, gronnet gant tud a gomz ur yezh estren, ar saozneg. Daoust hag eo-eñ un Alaman, un Iwerzhonad ? Hag an dud all, er straedoù, n'int ket Iwerzhoniz wirion ? Bugale ar c'harter a ra goap outañ hag ouzh e vreur, oc'h ober Hitler hag Eichmann anezho. Foeltr forzh ne ra lamponed Dulenn gant an iwerzhoneg. Tagañ a reont ar vreudeur Hamilton zoken : « Kasit anezho d'ar marv ! a youc'has unan anezho ». Estrengasaourien zo eus Dulenniz yaouank, maget ma vezont gant filmoù ha bannoù-treset ma vez lazhet

Alamaned ferv diouzh an druilh...

Lodenn sevenadur hag istor Bro-Alamagn a zo pouezus el levr. A-drugarez da zeiz-levr ar vamm, eñvorennoù he « film e gwenn-ha-du », e keñverier sevenadur Alamaned gant sevenadur Iwerzhoniz, gant un tamm mat a fent a-wechoù. Ober a reomp anaoudegezh gant tud kalonek hag o deus enebet ouzh Hitler. Empentiñ a ra Hugo un emgav etre Patrick Pearse ha Claus Shenk von Stauffenberg, an den en doa lakaet ur vombezenn da darzhañ ouzh treid Hitler, hep ober berzh. « Heñvel e oant an eil ouzh egile evel daou vreur. Claus ha Patrick. [...] O sevel un abadenn margodennoù a-enep an nazied e oa Claus ha Patrick a oa oc'h ober kement all a-enep Breizveuriz. Gouzout a ouie Claus e c'hellje an dud c'hoarzhin goap outañ en Alamagn hag e ouie Patrick e vije c'hoarzhed goap outañ, hep mar ebet en Iwerzhon. [...] Met n'o doa ket aon da vezañ koll. N'o doa ket aon da vezañ kaset ouzh ur voger ha diskaret. »

Ul levr leun a from hag a zoan eo *Ar re vrizhellet*, pell diouzh ar c'hlichedoù. « Bezañ

zo traoù hoc'h eus da hêrezh digant ho tad, neket e dal pe e vouse'hoarzh pe e c'harr gamm hepken, met traoù all evel an

dristidigezh, an naon hag ar gloazioù. »

MbdB

Juluan hag al Louarn,
gant Joe Todd-Stanton,
brezhoneg gant
Tifenn Merien,
Timeleenn,
34 fajenn, 12€



Meur a levr evit ar vugale yaouank am eus bet tro d'ober marzh warno e saloñs Karaez. Vad a ra ! C'hoant am eus da lakaat war wel *Julian hag al louarn*, bet embannet gant *Timeleenn*, eus Naoned. Klask a ra ar gevredigezh *Timeleenn* reiñ plijadur lenn d'an holl vugale, ar re o deus diaesterioù en o zouez, ar re zisleksek da skouer. Ha graet o deus mil gant *Juluan hag al louarn*. Pell zo ne oan ket bet ken plijet gant ul levr evit ar re vihan-tout, etre daou vloaz hag eizh vloaz pe se. An istor a zo eeun-kenañ koulskoude. Poan he deus Juluan, al logoden-nig, o kavout he flas er bed ha dibabet he deus ren ur vuhez digavandenn ha didrubuilh. Betek m'en em gavo gant ur pezh mell louarn marnaoniek...

Perak eo ken dibar al levr-se neuze ? Sklaer, berr, hag aes eo an testennoù. Un dra vat evit bugale o teskiñ ar yezh. Intret eo an dezrevell gant aon ha mousfent a bep eil. Livet flamm eo an tresadennoù. Ha pegen eztaolus ! Kalz munudoù fentus a c'heller merzout e douarennoù ar familhoù loened. Ha kalone-kaus eo kentel ar gontadenn : evit kaout mignoned e ranker mont en tu-hont d'an aon hag an emgarantez... Un arguzenn all zo, disheñvel he natur : n'eo ket bet moullet an albom brav-mañ nag e Sina, nag e Broioù ar Reter, met e Ti Cloître, e Sant-Tonan. An neb a venn, hennezh a c'hell...

MbdB

**Petra din-me...,
gant Mikael Madeg,
Kêredol,
937 pajenn, 39€**



Gwechall e kustume ar skri-vagnerien diskoachañ lizheroù dizanv ha dornskridoù kozh en dielloù pe war ribl an hent. Gwechall a oa gwechall avat ha bremañ ez eus doareoù all. E 2020 e oa bet embannet eñvo-rennoù ur Breton kozh, nevezik marvet hag enrollet e vouezh gantañ e-unan : « Plijadur 'm bez o kontañ amañ anv eus va bugaleaj e Santeg, ha pa ne vije den o selaou, pe abalamour ne 'z eus den, just a-walc'h. Daoust ha te 'raio un dro bennak ? Ha da ober petra gant kement-mañ ? »

Ur romant evel-just, prestet e oa bet ar mekanik dezhañ gant... Mikael Madeg. Ur pezhiaid romant ez eo : istor François Abgrall, mab-bihan ur julod, kaset da vagañ e-touez Arvoriz, deut en-dro da Landi, lakaet war ar studi hag aet d'an Aljeri da-c'houde, e-giz kemend-all a

Vretoned yaouank d'ar poent-se... Istor ar vro ivez, tro-spered Leoniz, o anvioù, o lesanvioù... Gouiziok ha distagellet-kaer eo an Abgrall ha brav – re vray ? – e teu gantañ. Nag a chaok !

Ampart eo ar skrivagner war e vicher avat, brav eo an daolenn ha kempenn an danevellin. Ur mell troiad e Breizh hag en Aljeri ez eo, met a-dreuz... ar gweleoù hag al lec'hioù distro. Lenn a reer an traoù dous ha lik a oa bet e buhez François – « Sasa » – Abgrall : bronnoù Liz-an-Ti-all, ar c'hoari daou gant Tinig er gwele kloz, ar garantez tener gant Dorote... Traoù kriz ivez ha traoù lik adarre e-doug e goñje, traoù loudour zokenoc'h !

Buhez Mab-den marteze, klask a ra an Abgrall tennañ e spilhenn eus ar c'hoari atav : deskiñ, prenañ skiant digant an dud ha sach an hini ma c'hell !

Buhez merc'hed Eva c'hoazh... Ur petra din-me
douetus. Int-i a gas an traoù fonnus eo, aes da lenn ha
en-dro ha pa vije skrijus pe plijadurus alies, traoù diaes,
skrijusoc'h o flanedenn atav : traoù divalav ha traoù brav oc'h
divroañ, kuzhat, fortunianñ dre ober anezhañ.
heg pe ober traoù gwashoc'h

EH

KELAOUENNOÙ



Riwal HUON
Jerom OLIVRY
Tudual HUON

> Bremañ (433)

« Kelt pe digelt ? » Sed aze ar goulenn savet e teuliad niverenn 433 **Bremañ**. Ha ne vefe ket eus ar Gelted kozh ? Ur gwir gevrin e kendalc'h da vezañ ar « bobl »-se. Goude un diverrañ dedennus-tre eus an holl enklaskoù ha teoriennoù a zo bet graet diwar-benn hon hendadoù en Europa e vezer kaset da Hallstatt, en Aostria, e-lec'h ma oa

bet kavet, en XIX^{vet} kantved, ur pikol bered gelt. Kaset e vezer tostoc'h ouzhimp goude-se, er broioù germanek, a-raok echuiñ gant ur pennad-kaoz gant Gi Keltik, unan eus dileuridi Breizh e Kevre Keltiek (*Celtic League*).

